

O NA KAER EO !

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg



O na kaer eo, o na splann eo, Ke - ment 'peus greet, Ao - trou Dou - e !



1. Greet 'peus an oabl hag ar ste - red, An heol, al loar hag al lu - hed.
2. Greet 'peus al loen hag al la - bous, Pes - ked ar mor ha gwe - nan rouz.
3. Greet 'peus ar béd 'vel eur c'ha - vell, Greet 'peus an dén hag ar bu - gel.



1. Greet 'peus ar mor, an dou - re - ier, Ar me - nez sonn, ar par - ke - ier.
2. Greet 'peus ar gwez gand o 'frou - ez Ar bleu - niou kaer, ar geot te - ner.
3. Greet 'peus pép tra e - vi - dom - ni, Ma kan - (n)im deoc'h or meu - leu - di.

Diskan : O na kaer eo, o na splann eo, Kement 'peus greet, Aotrou Doue !

1. Greet 'peus an oabl hag ar stered, An heol, al loar hag al luhed.
Greet 'peus ar mor, an doureier, Ar menez sonn, ar parkeier.
2. Greet 'peus al loen hag al labous, Pesked ar mor ha gwenan rouz.
Greet 'peus ar gwez gand o 'frouez Ar bleuniou kaer, ar geot tener.
3. Greet 'peus ar béd 'vel eur c'havell, Greet 'peus an dén hag ar bugel.
Greet 'peus pép tra evidom-ni, Ma kanim deoc'h or meuleudi.

Ô, QUE C'EST BEAU !

R: Ô, que c'est beau, que c'est splendide tout ce que Tu as fait, Seigneur Dieu !

1. Tu as fait le ciel et les étoiles, le soleil, la lune et les éclairs.
Tu as fait la mer, les eaux, la montagne raide, les campagnes.
2. Tu as fait la bête et l'oiseau, les poissons de la mer et la rousse abeille.
Tu as fait les arbres avec leurs fruits, les belles fleurs, l'herbe tendre.
3. Tu as fait le monde comme un berceau, Tu as fait l'homme et l'enfant.
Tu as fait toute chose pour nous, pour que nous Te chantions notre louange.